



Deñved

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv?

Adalek ar CP en ur sal vras pe er maez

Talvoudegezh ar c'hoari

- mestroniañ an egor, an amzer, ar c'horf
- kontañ betek 12
- Lavarout an eur, kreizteiz, hanternoz

Pal ar c'hoari

Evit an deñved, mont e-barzh ar c'hraou hep bezañ tapet gant ar bleiz
O pourmen emañ ar bleiz hag an deñved

Kanet e vez gant an deñved :

- « ni `zo pourmen `barzh ar c'hoad
- « disoñjet an eur ganeomp
- « Bleiz, bleiz, pet eur eo ?

Ar bleiz a respont :

« un eur eo pe div eur pe c'hwec'h eur eo

Kanet e vez adarre gant an deñved en ur bourmen keit ha ma respont ar bleiz : « hanternoz eo » pe « kreiznoz eo ». Neuze e red an deñved buantre betek ar c'hraou.

An hini kentañ a vez tapet gant ar bleiz a zeu da vezañ ar bleiz d'e dro